

N1-4-044

Sauveur d'ad 28/9/27

KANTIK ITRON VARIA AR MOR.

Var don : *Kantik Beg ar Raz.*

DISKAN

*Guerc'hez, Rouanet ar an Arvor,
Roit ho pennoz d'an dud a vor!
Pedit, pedit ho Mab Jezuz
Da veza ouzomp truezad!*

Hor micher-ni a zo lienvel
Ouz micher goz an Ebestel;
Ni eveldho a rank poania
Er mor da c'honit hor bara.

Choazet hon euz eur goal labour;
Nag a zanjeroù var an dour!
Mes gant ar Verc'hez benniget
En danjer e vimp diouallet

Pa z omp tolet ha distolet
Dre nerz an avel dirallet.
Beillit varnomp, o Mam' dener.
Hon diouallit dionz ar feier.

Goulen a reomp ive Guerc'hez,
Ma teui da vad ar beskerez,
Ma c'hellimp, divar hon labour,
Digass d'on tud eun tam sikour.

Vit plijout d'ho kalon ar varam,
Ni vezo bugale divlam
En hon touez grit ne vo mui
Na labour sul, na mesventi.

Bemdez e larimp hor peden,
Bep sul e klevimp oferen,
Ha morse ne jomimp re bell
Heb tostât ouz an dol zantel.

Pa zeui hon devez diveza,
Ni ho ped, Itron Varia,
Deut da sturia kon eneo
Betek porz euruz an Envou.

